

Yannik hag e gamaladet da zeiz Nedelek



Ar vugale : E pe leac'h oud bed, va breur, E



pe leac'h oud bet? Bet oun e Beth-le-em Hag em eus gue-let



Ar c'hroua-dur ga-net deomp Vit pre-na ar bed.

1 E pe leac'h oud bet, va breur
E pe leac'h oud bet?

Bet oun e Bethléem
Hag e meus guolet
Ar c'hrouadur ganet deomp
Vit prena ar bed.

Ha koant eo, lavar, va breur,
Ha koant eo, lavar?

Bravoc'h, nil guech bravoc'h
Eget fors petra,
N'hellan ket laret deoc'h
Pegen koant ema.

2 Petra e peus grêt, va breur,
Petra e peus grêt?

Var al leur hep dale
E meus daoulinet
D'adori Mab Doue
Er bed diskennet.

3 Ne peus ket komzet, va breur,
Ne peus ket komzet?

Dezan meus lavaret
Gant eur joa dispar :
O krouadur benniget,
A galon m'ho kar.

4 Netra ken varlerc'h, va breur,
Netra ken varlerc'h?

Lavaret meus ivez
D'e Vamm, ar Verchez :
— Vit meste an holl danvez
Pebez dievez!

Gwir e lavarez, va breur,
Gwir e lavarez?

Ia, eme an Itron,
Peguit eo ganet
Da zistag' ho kalon
D'oc'h holl draou ar bed.

5 Petra c'hoaz goude, va breur,
Petra c'hoaz goude?

Ha neuze ar Verchez
Lavar gant dousder :
— Roit ho kalon abez
D'am Mab, ho Salver.

6 Netra guell d'ober, va breur,
Netra guell d'ober.

Roomp ta da Jezus
Holl hor c'harantez,
Ma vezimp erurus
Gant e levenez.